


KANNADIG GWALARN

Eun Niverenn hep Miz — Ar Pemzek eus ar Miz



*Ar vag « Artiglio », a zo bet o pesketa, aour an
« Ejipt » e strad ar mor.*

KANNADIG GWALARN

ne goust nemet DEK LUR
ar bloaz

(Broiou estren: 15 lur)

Skrivit da:

Journal de GWALARN

Boite Postale 75, Brest

(C.C. 96-38, Rennes)



TAOLENN



KELEIER AR MIZ



Kontadenn

AR VLEIZEZ




AN ELEKTRISITE
HAG AL LABOUR-DOUAR



G. AR YANN
EUR BEAJOUR A VREIZ



DRE AR VRO
PAJENN AR MERC'HED
PAJENN AR VUCALE
A-ZEHOU HAG A-GLEIZ
FENTICELLOU
HOR BOEST-LIZIRI



HOR BOEST-LIZIRI

Setu amañ « Kannadig Gwalarn ». Dister eo. Hogen pep tra vras a zo bet graet er bed-mañ a zo bet dister da genta.

« Kannadig Gwalarn » a zo bet savet evit rei plijadur d'an dud. Traou fentus a vo kavet ennañ e-kichen traou a bouez. Bez' e vo ennañ peadra da lenn evit an holl.

« Kannadig Gwalarn » a gas e c'hourc'hemennoù d'an holl Vretoned a lenno anezhañ, ar re a zo e Breiz hag ar re a zo skrignet dre ar bed holl. Klask a raio servija anezo e pep giz. Bez' e vo evel eul liamm etrezo. Deski a raio d'ar re na ouzont ket pebez pobl dispar eo pobl ar Vretoned, ha petra a c'hell ober ar Vretoned pa garont.

Amañ n'hon eus nemet eur ger-stur :

Bevet ar Vretoned ! Bevet hor bro garet Breiz !

Liziri, mar plij

Bretoned a vro Leon, a vro Dreger, a vro Wened, a vro Gerne, Bretoned a Vreiz-Uhel, ha c'hrou, labourerien ha maroloded a Vreiz, en holl vroù ha war an holl vroù eus ar bed, skrivit d'imp hec'h son, ma hoch eus em dra bennak da c'houlenn pe da lavarout. Eur bajenn eus *Kannadig Gwalarn* a vo prest atao da zigemer ho liziri.



Er Spagn ez eus bet roialisted o klask diskar ar Republik. 51 anezo a zo bet barnet ha kavet kuit eus ar vro. Amañ e weler anezo e Cadix (Cellon-Paris).

E pelec'h n'eus ket a Vretoned ?

« Bejet em eus en Afrik en Amerik hag en Ozean hag e pep lec'h em eus kavet Bretoned. E New-York evel e Madagaskar, evel en Nevez-Kaledoni, klevet em eus tud o kaezel brezoneg. Deut omd da gredi ez eo gwir al lavarenn goz : » E pep lec'h ma tremen an heol e tremen ivez ar Breton.

MARTOLOD.

Ano hor C'hannadig

« Gwelet em eus niverenn miz neuz. Mat a-walc'h lien kavan, gwelloc'h eget kement tra a zo bet graet betek bremañ. Hogen kalz a chom c'hoaz da ober. Eun dra a venegin d'eooc'h hepken : an ano. An ano-se a « Gannadig » a zispilj d'in kenañ : koz eo. Ober a ra l'eooc'h sonjal en eur bern kuzetomougoù parrez, nebet diouz an amzer-vremoù dre an disbarz evel dre an divaez. Setu aze va menoz. Gant plijadur e welen achanoc'h o lakaat eun dra bennak en e lec'h evel « Gwalarn, Kornog, hag all... »

A. P.

Ar yoyo

« Penaos e vez lavaret yoyo e brezoneg mat ? »

YOYOEREZ.

Respont. — Alies-uec'het a teu d'imp liziri de c'houdeun gwir ano brezonek eun dra pe dra. Unan a garfe gouzout petra a vez graet eus eur *moineur*, egile eus eur *parachute*, hag all. Setu bremañ tro ar yoyo.

Ma ! ma ! na ne fell ket d'eooc'h lavarout yoyo, lavarit : kornigell-indian, kornigell-skourr, kornigell-a-tribil, kornigell-war-bouez-borden, kornigell-veni, kanel-gornigell.

Grit ho c'hoaz eta, dimezell Kannelgornigellerez !

KELEIER AR MIZ

Ar c'honversion

D'ar 16 eus ar miz eo bet votet, e Paris, gant ar Gambre, konversion ar rantou. Antronoz e voe votet ivez gant ar Sened.

Dre ar c'honversion-se, interest an arc'hant plaset war ar Stad abaoe 1915 a zo digresket. Ar c'hospital a roe 5, 6 ha 7 % betek bremañ ne roio mui nemet 4,5 %.

Setu eta eur c'holl adarre evit an dud o doa prestet arc'hant d'ar gouarnamant. An darn vuia anezo o doa roet eur c'hospital en « our », hag e veze paeet d'ezo an interest e « paper ». Setu digresket c'hoaz an interest-paper-se !

An Alamagn

Ar Reichstag, pe Kambre an Deputeed, a zo bet torret d'an 12 gant ar ministr Von Papen, a zo e penn ar gouarnamant. N'en doa en em votet nemet diou wech.

D'ar sul 4, 160.000 a dud, izili ar « C'haskou Dir », o doa tremenet dirak ar C'hronprinz koz, war dachenn Tempelhof. Ha setu an holl o krial haro war an Alamaned abalamour da se.

Efin, gouarnamant an Alamagn en deus kaset da c'houarnamant Bro-C'hall eul lizer da c'houlenn evit an Alamaned ar gwir d'en em arma evel ar re all. Petra a reas Herriot, kenta ministr Bro-C'hall, nemet kas al lizer-se da c'houarnamant Bro-Saoz. Hemañ en deus embannet war se eul lizer all, da lavarout e vije gwelloc'h c'hoaz lakaat an holl vroù da zizarma.

En eur brezegenn vras, d'ar 25, Herriot en deus diskleriet ne felle ket da Vro-C'hall, e doare ebet, e vije cheñchet netra e skrid-emploe Versailles.

Gorguloff

Gorguloff, an den hanter ziskiant a lazaz Doumer, President Republik Bro-C'hall, a zo bet trouc'het e benn d'ar 14.

An dorifora

War-lerc'h broiou all, an Holland he deus lakaet harz war ar patatez o tont eus ar Frañs. Evit kas patatez d'ar vro-se, e vo ret kas eur sertifika da zis-

kouez n'int ket bet taget gant ar c'houil flacius-se. Setu eun taol fall adarre evit Breiz.

Eur gwall zarvoud

E Turenne, en Aljeri, e-kichen Tlemsen, eun treñ leun a soudarded eus al Lejion a zo kouezet e traon eur stankenn, d'ez 80 metr a zounder : 60 lazet hag ouzpenn 200 gloazet.

Ar « Persée »

Goude al lestr-splujer « Prométhée », setu unan all, ar « Persée », c'hoarvezet gantañ eur gwall zarvoud e Cherbourg. Ar wech-mañ n'eo ket kollet ar vag, met c'houec'h den a zo bet lazet, ha kalz gloazet, en o zouez Bretoned.

Konferans Stresa

Eur c'hoñferañs dalc'het e Stresa, en Itali, evit gwellaat stad broiou kreiz an Europ, n'en deus garet labour vat ebet.

Gandhi


Bec'h a gav ar Saozon atao en Indez. Gandhi, a zo dalc'het e prizon ganto, en deus nac'het kemer boued, ken na vije roet o gwir d'ar beorien eus e vro, gwasket ha dismegañset gant an dud uhel. A-benn ar fin, ar Saozon hag an dud uhel o deus rannet plega.

E Jenev

Kuzul Kevredigez ar Broiou a zo en em votet e Jenev, d'an 23, dindan renadur De Valera, Prezidant Stad Dishual Iwerzon. Hemañ, e-lec'h ar brezegenn a oa bet aozet evitañ en a-raok, en deus diskleriet traez e venozioù. Kevredigez ar Broiou, emezañ, ne vo mat nemet en deiz ma vo lakaet par he holl izili, — e-lec'h bremañ ar broiou bras, ar re o deus ar-meoù niverus ha bagou-brezel e-leiz, a c'hell ober peza garont.

Den ebet n'en deus staket e zaouarn d'ezañ. Gwellet fall e vez atao neb a lavar ar wirionez.

Prezegenn De Valera a oa e saozneg hag en iwerzoneg.



Sir John Simon, unan eus ministrer Bro-Saoz, o ligouezout e Croydon war e zistro eus Jenev



Mab roue ar Roumani a zo bet oc'h ober eun dro e Paris hag e Londrez da welout e vamm, ar brinsez Helena



Ne glevet nemet trouz a vrezet en Europ. Amdañ ar jeneral Weygand ha Paul Boncour er manevroù bras graet gant ar Frañsizien e Champagn (Cellon-Paris).



Ar marechal Lyautey er manevroù e Champagn.



Ar jeneral Von Schleicher, a lavar e rank an Alamaned arma evel ar re all.



Tra n'emañ ar Frañsizien oc'h arma, an Italianed ne gollont ket o amzer, 50.000 a baotred yaonank a weler dastumet amañ e Rom. Desket e vez d'ezo micher an armou gant o mistri (Cellon-Paris).



E pep kêr eus Breiz e vez graet eur « brederez », da weza marc'had-mal a bep seurt traou koz hag a bep seurt koz traou. Setu amañ eur skeudenn eus hint Brest.

E gwerz e ti « Gwalarn »

COURS ELEMENTAIRE DE BRETON
(dre ar post)..... 12 lur

GRAMMAIRE BRETONNE
(dre ar post)..... 3 lur (1 skoed)

DICTIONNAIRE BRETON-FRANÇAIS
(dre ar post)..... 22 lur

DRE ar VRO

Bleun-Brug Brest

Goueliou bras ar Bleun-Brug a zo bet graet e Brest d'ar 4, 5, 6 ha 7 a viz gwengolo, dindan renadur an Ao. D' Cornic.

D'ar sul e voe gourenadegou ha kaniri er Velodrom. D'al lun e voe tro ar studiadennoù. Prezegennou dudius a voe graet gant an Ao. Chaloni Uguen, person Plougastell, an Ao. Tréguier, kelenner e skolaj Sant Loeiz, an Ao. Bécot, eus an Traez-Hir, hag all. D'an noz e voe eun abadenn vrag e Sal ar Gouliou.

Ar gouarnamant, dre aon rak an otonomisted, emichañs, en doa nac'het rei an traou (muzikerien, kezeg, hag all) a oa bet prometet. Daoust da se e voe eun dibunadeg dre ar ruiou d'ar meurzh. Kaermeurbet e voe kavet gant an holl, hag e vije bet kaeroc'h c'hoaz panevet ar glao. An Ao. R. Micheau hag ar re all eus strollad ar gouel n'o doa ket espernet o foan evit kempenn pep tra a zoare. Diouz ar mintin e oa bet graet ar c'honkourioù lenn ha kana.

D'ar merc'her, ar vrugerien a yeas d'ober eur bourmenadenn vras. Mont a rejont d'an Traez-Hir, da Loumazed Penn-ar-Bed, ha da vered Konk da bedi war bez Ar Conideg, « tad ar brezoneg ». Neuze ez ejont betek Brelez da welout ti an Ao. Chevillotte, Maner Kergroadez.

Bleun-Brug Gras

Eur gouel all, bihanoc'h, a voe graet d'ar sul 18 e Gras-Gwengamp gant Bleun-Brug bro Dreger. Kaer-kenañ e voe ar gouel, met siouaz, d'an noz, e voe klevet eur gwall gelou: ar c'harr a gase « Paotred ar Minibriag » d'ar gêr a oa bet devet war an hent. An holl dud a oa e-barz a c'hellas mont er-maez hep droug, dre vuzud. Met kement tra, binviou muzik, bannielou, hag all, a voe pulluc'het. Eur gest a zo graet evit sikour ar strollad kalonek-se da brena binviou nevez. Kas an aluzenou da verour ar gazetenn « Breiz », an Ao. Le Clec'h, person Koadou, dre Wengamp.

Afer Roazon

Ar baotred yaouank o oa tamallet d'ezo beza bruznet monumant Roazon gant eun tenn-min, d'ar 7 a viz eost, a zo bet lezet da vont kuit eus ar prison d'an tregont. Bez' e teuer muioc'h-mui da gredi n'eo i o deus graet an taol. Ar boliserien o deus dalc'het da furchal e psp korn eus Breiz e-pad miz gwengolo.

Pardon bras ar Folgoad

N'eo ket bet ken kaer ar gouel er bloaz-mañ abalamour d'ar glao, a gouezas eus ar mintin betek wardro kreisteiz. En oferenn-bred, ar brezegenn a voe graet gant an Ao. Chaloni Kerbaol, person Ploueskad, e-barz an iliz, a oa leun-chouk a dud, evel ma c'heller kredi! An Aotrou arc'heskob Roazon a gomas e-pad ar gousperou.

Ar pesketaerez

Atao ar memes tra en hor porziou-pesketaerez: ne vez mui gwerzet ar pesked, ha setu ar besketaerien hag o familhou en dienez. A bep seurt kaozeadennoù a vez graet, a bep seurt pennadoù moulet war ar c'hazetennoù. Darn a damall perc'hennet an uzinou, darn ar varc'hadourien, darn an heñchou-houarn, darn ar besketaerien o-unan. Hag atao ne reer netra, pe koulz netra!

Ar « Seefalk » hag an « Iroise »

Ar vag « Iroise », he deus saveteet kement a vagoù paket gant ar wall amzer, a oa bet dizarmet, peogwir e oa deut eur vag alaman, ar « Seefalk », da gemer he flas. Setu ma vo adarmet hep dale.

Eun dra vat, e gwirionez. Mez eo gwelout estrenien o tont da denna ar bara diouz genou hor martoloded. Ha koulskoude, ar « Seefalk » a zo kalz gwelloc'h, kalz kreñvoc'h, kalz buanoc'h, kalz muioc'h diouz an amzer-vremañ eget an « Iroise ». Bez' ez eo, a lavarer, gwella bag-saveteerez ar bed-holl.

Neuze: perak n'eus ket ganeomp eur vag evel-se? Ha ne vefe ket gwelloc'h implijet hon arc'hant o prena eur vag e-giz ar « Seefalk » eget o sikour ar Compagnunvez Treuzatlantik, ha me 'oar?



Paotred eus Plougastell gant o gwiskamañchoù kaer e Brest da zeiz ar Bleun-Brug.

LENNIT « GWALARN »

Niverenn miz gwengolo:

AN TASMANT DIMEZET
kontadenn gant Hoffmann

Niverenn miz here:

CWELEDICEZ MAB KONCLIN
marvailh farsus

Niverenn miz du:

AR C'HOAR HENA

kontadenn gant Roparz Hemon

Pep niverenn (dre ar post): 16 real

GWILHERM AR YANN

EUR BEAJOUR A VREIZ

Eur paotr a Vreiz-Izel

Gwilherm Ar Yann a zo ganet e mil eiz kant eiz war-nugent (1828), e Plegad-Gweran, e-kichen Montroulez. E dud a oa gouindeien-dour. Met abred-meurbet, evel kement a Vretoned all, ez eas da redek bro.

O klask mammennou an Nil


Eur veaj kenta a reas e bro Durki. Da c'houde ez eas d'an Ejipt. En amzer-se, ne ouied ket c'hoaz eus pelec'h e teue an Nil, ar stêr vras a red dre ar vro-se, ha meur a veajour en doa klasket ar mammennou, en aner. Setu Ar Yann en e hent evel ar re all. Met evel ar re all e reas, taol gwenn, hag e rankas dont en-dro hep heza kavet netra.

Ar Prezidant o skuba e di!

E mil eiz kant daou ha tri-nugent (1862), e oa Ar Yann adarre e traonienn an Nil. Karget e oa bet gant ar gouarnamant da vont da gaout Teodoros, *negus* pe roue bro Abisini.

War e hent etrezek ar vro-se e tleas dre eur gêr, anvet Gallabat, kêrbenn eur republik vihan a vorland. Mont a reas Ar Yann evel just da welout Prezidant ar Republik-se. Setu ma kavas anezañ o skuba ar porz dirak e di. Ar Prezidant a gimigas d'ar heajour breton da zebri ha da eva. Met ne ziskrogas ket diouz e valaenn evit se.

— Al labour da genta, aotrou ! emezañ.



E Paris, eur bern genaoutien ael da glask gwelout eun dra bennak d'ar minitri ma voe dibennet Gorguloff (Cellon-Paris).

Bro Abisini

Ar re ac'hanoc'h n'o deus ket ankounac'haet o Istor Santel o deus soñj eus rouanez Saba, an hini a yeas da gaout Salomon, roue bras ar Yuzovien. War a lavarar, e teue ar rouanez-se eus bro Abisini, a zo eur vro e-kreiz ar menezioù, pell-pell er c'hreisteiz eus an Ejipt. Ar pezh a zo sur eo ez eo tud an Abisini disheñvel-bras diouz ar poblou tro-war-dro, hag ez int kristenien, evito da gaout eun doare iskis a-walc'h a gristeniezh.

Teodoros

Setu amañ penaos e kont Ar Yann ar weladenn genta a reas da roue an Abisini, an *negus* Teodoros, d'ar pemp war-nugent a viz genver eiz kant tri ha tri-nugent (1863) :

« Lavarat e oa bet d'in, emezañ, e tleas an *negus* lakat tenna eur seurt kamol graet evitañ gant ar visio-nerien. Gwisket em boa eta va dilhad konsul. War-dro dek eur, e teuas unan bennak da gemenn d'in e oa ar roue o tont. Mont a ris er-maez raktal, hag e welis eur bagad trouz-meurbet a ofiserien vras, gwisket ganto o saecou broudet, re an devezion gouel. En o c'hreiz e oa eun den, diskabell ha diare'henn, en-dro d'ezañ eur vantell soudard na oa ket eus ar re wenna, eur sabrenn gavalier stag ouz e c'houriz, hag eur goaf (pe eul *lañs*) en e zourn, ma en em harpe warnañ o vale. Aes e oa gwelout koulskoude e oa heñ ar roue, peogwir ne oa nemetañ a zement a oa gollet e zion skoaz gant eur vantell. An den-se a oa Teodoros II, Roue ar Rouand ! »

Ar Yann ha leoned ar roue

Antronoz, Ar Yann a zigigas d'an *negus* lizerou digant gouarnamant Bro-C'hall, hag a voe digemeret gantañ a-zoare. E oa Teodoros azaset war e drou, e-kreiz eun bagad leoned bras. Doñv e oa an anevaled-se. Unan anez a deuas da lakat e baou a-raok war diskoaz ar paour kaez konsul. Hemañ, emezañ, a venas koueza gant an aon.

Ar Yann taolet en toull-bac'h

Hegarar-meurbet e oa Teodoros e-keñver Ar Yann. Met ne felle ket d'ezañ lezel anezañ da vont kuit.


Eun deiz ma teue Ar Yann d'e gaout, da c'houlenn koñje digantañ da vont en eun enezenn vihan, er Mor Ruz, kounnar vras a savas e Teodoros.

— Ne day ket ! eme an *negus*, o skei gant e droad. Tapit krog ennañ, ehadennit anezañ, ha ma klask tec'hout, ra vo paket ha lazet !

C'houec'h den a grogas ennañ. Unan a startas e vruched, ken na venas mouga. Daou all a ziframmas e dog hag e gize dioutañ. Neuze e voe digaset eur chadenn houarn pouinner, hag a voe rinvedet ouz daou arzoarn hor c'henvroad sabatuet.

Chom a reas evel-se e-pad pemp eur war-nugent. Neuze e voe lezet da vont, hag e voe diskleriet d'ezañ ar pezh a oa c'hoarvezet :

An *negus* Teodoros a oa mezo-dall, ha ne ouie ket petra a rae !



E bro Indez, tra n'edo Gandhi o yuna, edo ar heorien o pedi (en traoñ e weler e boltred) (Cellon-Paris).

Merc'hed faro an Abisini

Pourmen a reas Ar Yann dre ar vro. Gwelout a reas Gondar, a oa neuze ar gerbenn. Eur gêr binvidik e oa, savet war vorid eul lenn, enni marc'hadourien, micherourien ha tud onziek e-leiz. Evel merc'hed ar c'hêriou, merc'hed Gondar a oa faro-meurbet. E-lec'h mont gant o zred noaz, e-giz merc'hed all ar vro, botou o doa, ha chadennouigoù arc'hant ouz traoñ o divesker. Brozioù gwenn a oa ganto, hag eur *burnous* (pe vantell hir) e seiz glas, plakou ar' haut kizallet hag alaouret gwriet warnañ. An itronnezid pinvidik ne daent morse war droad, met war gen eur mull, eur sklavaz o ter'had penn al loen, eur vatez o kerzout war-lerc'h, hag alies eur bagad gwazed, armet gant goañou ha skoedou.

Ar venec'h gwall nec'het

En Abisini e oa meur a goment, enno menezec'h o heulia, evel just, religion ar vro. E-barz ar c'houlennou-se e voze roet bod d'ar veajourien. Met difenn a oa d'eur vaonez, pe zoken d'eur vamm-loen bennak dont e-barz ar goment.

Pegen nec'het e voe eta ar venec'h vat eun deiz, pa deuas Ar Yann da c'houlenn lojeiz evitañ hag e vulez ! Ret e voe d'ezañ tubatal gant ar manac'h-porzier, ha ne felle ket d'ezañ digemer al loen e-barz ar mogerioù santel.

(ar fin, p. 15)

PAJENN AR MERCHED

AN TI

An tan

Lakañ holen e-barz dour bero ha leziñ an dour da virri e-pad pemp munutenn da nebenta. Taolñ an dour war ho sailhad c'hloñ. An tan a vo kalz splannoñ'h ha tomnoñ'h e-giz-se.

Al ludu

Na daññ ket al ludu er-maez. Silñ, gwalc'hñ ha see'hñ anezañ. Ho tan a chomo beo dindan.

Dihad ar re vihan

Prenñ « alun » digant an apotiker ha lakañ eun dourmad mat e-barz an diweza sailhad dour na walc'hñ enni hienaj ar re vihan, pe ridoñou ar c'havell. Evel-se, ne c'hell ket an tan kregi e-barz.

AR GEGIN

Ar piz bihan

Pa vezon sech, n'ni ket gwall vat da zeñra. Evit o lakaat da veza teñer ha sikret, n'hoc'h eus nemet o mrouz e-pad triouch eur e-barz eur sailhad dour klouar. Neuze, sechñ anezho ha lakañ anezho war eur blankan e-pad an diweza. Pa denñ kellañ er-maez, e c'hellou o tava. Sikret e vint.

Ar c'harotez

Ha gouzout a rit e c'hellñ ober souñenn gant delou karotez ? Ar memes d'az a vo gant ar souñenn-se evit pa lakañ karotez enni. Evit daou zen, ret eo lakaat poster pe homp delouan.

Ar c'hafe

Tud zo na garont ket choñez ar gegin. A-wechou ivez pa oñ al l'ez er-maez war ar fornicell ez eus eun choñez fall. Neuze lakañ eur c'hreñenn gafe pe zion war ar fornicell domm pe eun tamm « neri » hag ar choñez fall a yelo fall.

E breiz e vez graet kalz kafe. E pe di ne ever ket kafe bennez. Ha gwall ger en ar c'hafe breñañ. Evit esperñ eun tammig lakañ dour yez war ar c'hafe anel a lakañ e-barz ar c'hez en dez warderch. Test an bannier nebentoc'h a gate a implañ evel-se.

EVIT BEZA KOANT

Ar bleo

Pep hini en deus c'hoañt da veza koant, n'eo ket gwiz ? Ya, zoken ar baotred, nemet mez o deus d'hen auzay. Ma, — pa vezer oñh ober war-dro eun ti, dreist-holl e-pad an hañv, ne chom ket kalz amzer

evit en em ficher. Ha koulskoude, merc'hed, arabat ankounac'haat ho penn. — hag ho pleo dreist-holl ! N'hoñ eus ket trouc'het ho pleo, ha bravoc'h eo. Klevit avañ ! Ma 'z int rodellek dre natur, gwelñ a se evidoc'h. Ma n'int ket, na 'z it ket da rodella anezo gant eur fer tomm. Devet e vint kent pell, dilufr, mario, ha c'honñ ne viot ket koant neuz ! Broustñ mat ho pleo bennoz e-pad pemp munutenn da nebenta evit o naelaat a zoare. Kribit anezo hep abardaez ha hep mintin. Mes n'eo ket a-walc'h. Ret eo o gwalc'hñ. Arabat mont da di ar peruker da glask « sham-pooing » ha traon evel-se. Koll ar c'hant ha noñra ken. Gwalc'hñ ho pleo gant soavon. Lakañ kalz a zour. Arabat lezel nemet eun tammig soavon war ho pleo. Eur walc'hadenñ hep pennezek dez a zo a-walc'h ma ne 'z it ket er-maez hep tra ebet war ho penn. Neuze, avañ, gwalc'hñ anezo hep sizun. Dreist-holl soññit ez eo ret brousta ha kriba mat-tre ho pleo bennez. N'ho po ket a geuz pa velot pegen brao e vint goude se !



Eur plac'h divortil : an nijerez amerikan Mrs Hazlip, a nijas buanoc'h eget n'he dou graet maouez ebet a-raok : 408 km. an eur !

PAJENN AR VUGALE



AR C'HI BARBET OCH OBER SKOL

En eur c'hoad bras, a oa loened emañ a bep seurt, eur c'hi barbet, eun doktor en doa griet e studi, o veza bevet eur pennad mat e-touez an dud, a soñjas en em lakaat da ober skol. Gwelant a rae al loened yaouank er c'hoad-se a oa dezeg ha n'eo doa tamm sevenidigez. Fellout a rae d'ezañ eta rei d'ezo eun tammig deskadurez, ha dreist-holl desk d'ezo beva.

An doktor en doa brud, ha kerkent ha m'en doa digoret e skol, e tiredas al loened yaouank a brez hag a vandemon da resev e gentelion. Gwelant a raed eno mesk-ha-mesk loened, tigred, marmouzien, leouou, ebeulien, chas, kizier, ourzien, hag all, en eur ger, eus a gement gouenn loened a oa er c'hoad.

An doktor a boante. Ar skoljdi a zeske. Koulskoude al loened koz ne blije nemet d'ezo an deskadurez a roed d'o bugale. Ne gave ket d'ezo e vijent skolliet diouz o doare, ha dalc'hmat e teuent d'en em glemm ouz ar mestr-skol.

Ar c'had a deus da rebech e oa kalz re aouik e vugale. Ar bleiz en em glemme o lavarout e oa e vugale marlonk, ne oa netra evit o c'harga. An tigr a gave e vugale kalz re vuanek, re golerus. O Ha koulskoude, emezañ d'ar barbet, eo ret ho pefe lakaat anezo da drec'h gouenn, rak o mamm a oa ar wella eus ar mammou, n'oa drongiez ebet enni, ha me a

gav d'ha n'ens ket kenne-beut kalz a zrongiez ennoñ. »
Ar mare'h a denas ivez. « Asa, emezañ, mestr-skol, va bugale a zeske ganeoc'h, sevel a ra kañfarded anezo. Eur si bras, avañ, a welan enno, kiviouñ int, an distera tra a zispilj d'ezo, emañt o kriza o diskouarn hag o sevel o dlesker da rual. Mar o deskit da veza kiviouñ evel-se, ne raint ket kalz a enor d'eoñ. »

Neuze e tenas ar marmouz d'en em glemm eus e vugale, a oa desket d'ezo, emezañ, ober ardon hag orbidon ha n'eo devoa gwelet morse da ober er ger.


Al leon a denas goude, drog emañ, « Doktor Barbet, emezañ, va marb a zeskit da veza otus ha digar. Eus orgouilhñ e sav da veza. Ma n'hen deskit ket da veza hegaratoc'h, me hen tenno eus ar skol, hag a ray e skofia er ger dirak va daoulagad. »

Al loened all a denas ivez pep hini d'e dro, ha pep hini en doa eur rebech bemak da ober d'ar mestr-skol.

An ouz a gave e ourzien bihan pataok. Al loarn en doa aon na denje e vugale da veza re fin. Ar gwifiver a gave d'ezañ e oa re a fin en e re. Ar pemoc'h a lavaras en eur c'hrognal e tene e voc'higou bihan lonsoe'h-lonsa : kaer a oa o gwalc'hñ meur a wech bennez, e vezent atao goloet a gaillar pa zistroent eus ar skol. An azen zoken, en eur zifronellat, a donas ez-ve bennez soteo'h-sote e vugale. Skuiz ouz o c'hlevout, ar c'hi barbet a lavaras :

« Va mignoned, eemñt eun nebent ho pugale, ha rit skouer vat d'ezo, ha neuz digasit d'ar skol. »

G. MORVAN.



Eun doure nevez da zebri makaroni (Berliner Illustrirte Zeitung).

A-ZEHOU HAG A-GLEIZ

Ar pesk elektrik

C'houec'h pesk elektrik a zo nevez digouezet e Paris. Beg'ez eus kalz a loened hag a zo barrek da ziskarga elektrisite. Hogen ar pesk-man, an *electrophorus gymnoticus electricus*, heñvel a-walc'h ouz eur silienn, a ro eur red elektrik a 300 volt, peadra da elumi eur goulon.

Ar c'houec'h pesk a zo digouezet e Paris a zo bet lakaet e poull ar *Musée Colonial*. O c'houec'h en a zo du, eus tammig evel roullouz, gant pikou liou oranjez war ar penn ha war ar c'hoi.

An darn vrasa eus ar c'horf a zo eur gwir pil elektrik. Pa vez taolet eur pesk beo en dour, ar *gymnot* (evel-se ez eo anvet), a douch anezañ gant e lost, hag ar pesk paour a zo lazeta ha louket raktal.

Ar *gymnot* a vev en Amerik ar C'hreisteiz. An dud eus ar vro o deus aon bras raziñ, rak barrek eo da seiza eur marc'h, pe d'e laza zoken, pa emañ o treuzi eur siër.

Ar c'hrokodil o vont d'ar skol

Bugale a vez gwelet a-vechou o kas ganto d'ar skol c'houiled, laboused, logod, pe naered. Met ha klevet hoc'h eus biskoz komz eus eur c'hrokodil ?

Robin Copping, eus kêr Londrez, a oa bet roet d'ezañ nevez 'zo eur c'hrokodil bihan. Petra 'reas, nemet kas anezañ d'ar skol e-barz eur voest. (Ret d'ezañ gouzout n'en doa an avel nemet 50 santimetr a hirder).

Digeri a reas ar voest e-kreiz ar poz. Kerkent ha ma lakaas « Klada » (evel-se eo ano ar c'hrokodil) e

fri er-maez, an holl, mistri ha bugale, a gemeras an tecl'h. Met Klada ne glaskas ober droug da zen ebet. Ne reas netra nemet lammat eur pennadig, ha neuze chom astennet war ar geot, digor-bras e javedou.

Eur broad muioc'h, mar plij !

En eur barrez a Vro-Saoz, anvet Alethorpe, n'eus nemet eun den o chom.

Daou vloaz 'zo e oa unan all, ar pezh a rae daou, hag unan anezo a oa mæer ar gumun.

Bremen, n'eus mui a vaer, peogwir n'eus mui den ebet evit euvel anezañ.

Ar plac'hig hag he doa prenet ampoezen


N'eus ket gwall bell, e kêr vras Liverpool, e Bro-Saoz, e voe kaset eur plac'hig gant he mamm, a oa klaviv, da brena eur remed heñnak e ti eun apotiker.

An apotiker, hep gouzout d'ezañ, e-lec'h rei ar remed d'ar plac'hig, a roas d'ezañ ampoezen.

N'oa ket net mat ar plac'hig eus ar stal, ma welas eun apotiker e fazi. Penaos ober ? N'anavezse ket anez, ha kêr Liverpool a zo bras.

Graet e voe eun emblann raktal dre an T.S.F. Kaset e voe ar polis e kement skol-vev'hed a zo e kêr evit klask. Kavet e voe ar plac'hig e-benn ar fin eun skol anvet Skol an Itron Varia.

Sionaz ! Digaset he doa ar remed d'ar gêr a-raok mont d'ar skol. Aet ar polis prim-ha-prim da di ar vamm. Houtañ, eurusant, he doa kavet e oa eun dra heñnak iskis gant al louzon, ha n'he doa ket evet dioutañ.



An Tombola bras e Dublin, en Iwerzson, evit an ospitalion. Amañ emeur o veska 5,000,000 a vilhejou ! (Cellon-Paris).



Tri nijer amerikan, o dou klasket treuzi an Atlantik, ha n'eus mui ketou anezñ (Cellon-Paris).

(Kendalc'h ar b. 6)

Hag e hadas, ar plantennou a savas a-zoare hag a greskas kalz buanoc'h, Eun tamm mat brasoc'h ha kreñvoc'h eget gant ar gwella tenziou e teujont da veza. Krog e oa ar jardiner-se gant e daoliou-esa abaoe Nedeleg 1930. Bet en deus abaoe 6 eost hep bloaz, ha peñ him eus ar c'haera.

Setu eta gant an elektrisite an douar gouest da rei ne vern pe frouez, forz pegoulz. Ker eo an elektrisite, met da vare ar sivi e vez ker ivez ar c'haol, ha da vare an oranjez e vez ker al letuz. An him a ouezo gwerza a c'houezzo marteze padra da baea an elektrisite, e labour, hag en devo eun tammig gwerz-butun evitañ euspenn.

ERWAN TORRAVAL.

(Kendalc'h ar b. 11)

Ar beajou diweza hag ar maro

Ar Yann a voe kaset kuit eus an Abisini e miz gwengolo mil eiz kant tri ha tri-ugent (1863). Beaji a reas c'hoaz e bro Durki hag e broiou an Azi, diouz tu ar C'huz-Heol.

Taget gant an derzienn, e rankas distrei d'e vro c'henidik. Eno e varvas d'an eiz a viz c'houevrer mil eiz kant unnek ha tri-ugent (1871).

Hol lenneien eus ar c'harter-se a c'hello lavarout d'imp, emichañs, ha bez'ez eus e Plegad-Gweran unan heñnak en deus dalc'het soñj eus Gwilhelm Ar Yann.

FENTIGELLOU

Eur veuleudi

An dinezell !
— Biskoaz kenndall ! An anezeg en deus silape' eur maen e gweren ar prenestre pa oan o c'hoari ar piano !
He annezeg !
— Moarvat e oa evij klevout gwelloc'h !

Eun tribunal

Ar barrez, d'al laerez yaouank !
— N'hoñ eus ket soñjet en ho mamm, p'hoñ eus laeret ar re votonez ?
Al laerez !
— Tamm ebet. Re striz e vijent bet evit.

An emzivad

Ar vamm !
— Sell ha, Lili, ar paour kaez emzivad. Kollet en deus e dad hag e vamm.
Lili !
— Perak ne glask ket anezo ?

Er skol

Ar mestriskol !
— Ar Prizmaod a voe savet euspenn 2,000 vloaz 'zo.
Ar buzel !
— Met, aotrou, n'omp c'hoaz nemet er bloaz 1932 !


Eun itron vras

— Hounnez, a lavare eur c'hager, o komz eus eun itron nevez dent er barrez, a zo eun itron vras. Ne oar ket an diferañs etre eur vorzei-dañvad hag eur bruched-leue.

Eur vicher nevez

Enañ ar vestrez-skol ocl' ober eur gentel diwar-benn ar micherion ; tad Jani a zo martolod, tad Mari-Louiz a zo here, tad Katiel a zo marichal.

— Ha ne va bugale eme ar vestrez, petra oune-me ?
— Him ebet eus ar plac'hedigou ne lavar grik.
— Petra oune-me 'ta ? Ne glevit morse ho kerent o lavarout petra oune-me ?
Eur plac'hig a sav he biz !
— Eur strakell.



Ar yoyo war ar maer (Berliner Illustrirte Zeitung).

Lennit :

G WALARN

**Kazetenn vizek
e brezoneg uhel**

Priz : 30 lur diouz ar bloaz (broiou estren : 35 lur)

Adres : Journal de Gwalarn, Boîte Postale 75 - BREST (C. C. 96.38 Rennes)

Embannadurioù Gwalarn

1926

- J. Kerrien. — AR ROC'H TOULL. — Diviel.
J. M. Synge. — WAR VARG'H D'AR MOR. — 2 lur 25

1927

- Roparz Hemon. — AN AOTROU BIMBOCHET E BREIZ.
— Diviel.
T. C. Murray. — NEVEZ-AMZER. — 4 lur.
TONKADUR BUGALE TUIREANN. — 4 lur.
G. Th. Rotman. — PRINSEZIG AN DOUR. — Diviel.
GERIADUR GALLEK-BREZONEK A GORFADUREZ. —
Diviel.

1928

- Aeschulos. — PROMETHEUS EREET, AR BERSED. —
12 lur.
B. Potter. — PER AR C'HONIKL. — 1 lur.
G. Th. Rotman. — PRINSEZIG EN DEUR. — 5 lur.
H. Andersen. — PLAC'HIG VIHAN AR MOR. — 3 lur 60.
Roparz Hemon. — GERIADURIG-DOURN BREZONEK-
GALLEK. — 22 lur.
Roparz Hemon. — YEZADUR BERR AR BREZONEG. —
3 lur.
AR SIMBOL. — 0 lur 50

1929

- Meven Mordiern. — ISTOR AR BED, levrenn I. — 14 lur.
M. Gourlaouen. — LEVR AL LOENED. — 1 lur 75.
A. Blok. — AR PLAC'H DIANAV. — 4 lur.
G. Th. Rotman. — NIJADENN AN AOTROU SKANVIG.
— 5 lur.
A. Brizeng. — TELENN ARVOR, FURNEZ BREIZ. — 6 lur.
Roparz Hemon. — REIZSKRIVADUR AR BREZONEG. —
3 lur.

1930

- Meven Mordiern. — ISTOR AR BED, levrenn II. — 10 lur.
MARVAILHOU AR VRETONED. — Diviel.
ENKLASK DIWAR-BENN STAD AR BREZONEK E 1928.
— 4 lur.
GERIADURIG ESPERANTEK-BREZONEK. — 4 lur.
Roparz Hemon. — EUN DRO E KEMBRE (Gwalarn 24).
— 2 lur 50.

1931

- Abeozen. — PEVAR MARVAILH. — 3 lur.
Roparz Hemon. — EUR BREIZAD OC'H ADKAVOUT
BREIZ. — 15 lur.
OWEN HA LUNET. — 3 lur.
DIARMUID HA GRAINNE. — 5 lur.
Tanguy Malemanche. — AR BAGANIZ. — 10 lur.
Sei Chonagon. — NOTENNOU AR GOUBENNER. — 3 lur.
Roparz Hemon. — LINA, AN TAN E TI KERNASPREDEN
(peziou-e'hoari). — 4 lur.
Boccaccio. — AR MARVAILHER ITALIAT. — 5 lur.

1932

- Meavenn. — IWERZON DISHUAL, SKOL S. ENDA. — 4 lur.
X. de Langlais. — KANOU EN NOZ. — 10 lur.
D. K. Kongar. — AR WAZIG. — 3 lur.
Y. Drezen. — AN DOUR EN-DRO D'AN INIZI. — 4 lur.
Meavenn. — PA C'HOUEZ AVEL WALARN. — 5 lur.
Meven Mordiern. — ISTOR AR BED, levrenn III. — 8 lur.
Hoffmann. — AN TASMANT DIMEZET. — 4 lur.